

STROLLAD AN DESKADUREZH EIL DEREZ  
DANEVELLOU 1964  
displeget e Kallag d'an 18 c'hwevrer 1965  
da geñver  
AN TREDE BODADEG VLOAZ

I. - ROLL LABOUR

- 10.00
1. Degemer.
  2. Danevell Gwazva ar C'hreizennerezh.
  3. Danevell Gwazva ar Genurzh.
  4. Danevell Gwazva ar C'hengoun.
  5. Danevell Gwazva ar C'helenn.
  6. Danevell Gwazva ar Mererezh.
- 14.00
1. Raktresoù evit ar bloaz 1965.
  2. Displegadenn : Talvoudegezh an Istor en Deskadurezh.
  3. Klozadur.

II. - DEGEMER

Dalc'het eo bet emvodoù an Trede Bodadeg Vloaz en Ostaleri Monfort.

120 den a oa bet pedet.

70 o deus respontet (eleze 58 %),

27 o lavarout e teufent,

43 o lavarout ne oant ket evit dont.

29 den zo deuet d'ar Vodadeg (eleze 24 %).

### III. - DANEVELL GWAZVA AR C'HREIZENNEREZH

Urzhiañ ha seveniñ darempredoù ar Strollad eo kefridi Gwazva ar C'hreizennerezh.

Da heul an tres skouerlekaat kaset da benn e-kerz ar bloaz 1964 eo rannet an darempredoù evel-henn : darempredoù diabarzh ha darempredoù diavaez, pep hini eus an daou rumm-se o vezañ isrannet e darempredoù standur ha darempredoù dreiststandur. Darempredoù standur eo ar re a zo diferet gant ar reizhenoù; darempredoù dreiststandur ar re a sav da genver un degouezh divoutin.

1.1. An darempredoù standur diabarzh a ya war stankaat bep ma kresk obererezh ar Gwazvaoù. Ar peatañ darempredoù zo da skouer etre Gwazva ar C'helenn ha Gwazva ar C'hengour da genver savidigezh hag embannidigezh ar c'hentelioù : ouzhpenn ma ren bep sizhun kefridiad an daou Wazva-se un dalc'h labour c'hwac'h eurvezh, e renont e'hoazh etrezo, etrezo hag ar gelennerion un eskemm puih a skridoù, a zisplegadurioù hag a deulioù a bep saurt. Dre ar C'hreizennerezh e tremen un darn vat eus hevelep eskemmoù. Darempredoù stank zo ivez etre an holl Wazvaoù ha Gwazva ar Genurzh pa rankont kas dezhañ keloù eus kement labour a reont, etre an holl Wazvaoù ha Gwazva ar C'hengour pa rankont fiziout ennañ bep sizhun, bep pomeztezh pe bep miz diouzh an dro, eilekridoù eus kement teul kefridiel a savont. Etre Gwazva ar Mererezh hag an Izili-Harpañ pa rank kas dezho bep tri miz, hag, ouzhpenn, bewezh ma kasont o skodenn, ur stad eus o c'hont. Etre an tri c'hefridiad a zo fiziet enno kefridioc'h Gwazva ar Mererezh, h.a. An holl warempredoù-se a dremen dre Wazva ar C'hreizennerezh o lezel bewezh roudoù resis eus o zremen a dielloù ar Gwazva-se.

Tud atrewet e pep korn eus Breizh zo eus kefridiad S.A.D.E.D., ha ne oa nemet ur roudad stank a zarempredoù diferet resis betek ar mudoù en o stumm hag en o amzeriadur evit reiñ dezho an tu da labourat ingal, evit dero'hel anezho ken klet hag etre megerioù ur savadur-Stad, evit terriñ ar voger a zigenvezded o gwaska hag o dinerzhe. Goues d'an dud o-unan eo bet kresket o galloud labourat evit Breizh eus etre 50 % ha 60 % abaoe ma labouront e framm S.A.D.E.D. N'eus aze burzhud ebet. Hepken heuliañ reizh an darempredoù pact o terc'hel pep hini evel ma vez dalc'het al labourerion e forzh pe embregerezh e vont en-dro dre ar bed.

1.2. An darempredoù diabarzh dreiststandur eo ar re a vez skoulmet

bewezh ma teu un degouezh nann diawelet gant reizhenoù ar Strollad. Da skouer, ar wezh kentañ ma torras un Ezel ar genurzh, e rankas ar Gwazvaoù divizout war ar prim an angerzhadur resis da heuliañ en degouezh, ha, da heul, e kement degouezh heñvel. An darempredoù dreiststandur skoulmet neuze a zisoc'has diouzh un tu gant diskoula ar gudenn hiniennel stignet gant an Ezel fellat, diouzh an tu all gant savidigezh ur reizhenn nevez a-zivout an doare ober ouzh an Izili fellat. An eil gwezh m'en em gavas un Ezel o terriñ kenurzh ar Strollad, e voe sellet an afer evel un degouezh a standur, da vezañ reizhet dre hentennoù boas an darempredoù standur.

2.1. An darempredoù standur diavaez a sell ouzh daou rumm kengredoù : degemeridigezh an Izili, kevroll (enroll - ezroll) ar skolidi, - rak ar re-mañ ne vezont ket, evel skolidi, Izili eus ar Strollad.

E Gwazva ar C'hreizennerezh e vez fiziet an emell da vostañ d'an danvez Izili kement displegadur o devez ezhomm evit anavezout ar Strollad, ar gefridi o devo da seveniñ ennañ, kement teul o devez da leuniañ evit reiñ da c'houzout d'ar Strollad petra o deus graet ha petra int mennet d' ober. Dre Wazva ar C'hreizennerezh ez a en-dro un eskemm etre ar Poellgor-Leviañ, ar Poellgor-Harpañ hag an danvez Ezel Oberiant, an danvez Ezel-Harpañ betek degemeridigezh an Ezel.

Peursavelet eo bet e 1964 standur kevroll ar skolidi. E-ser reoliakaat an dachenn-mañ eus an obererezh e voe graet anv evit ar wezh kentañ eus un teuliadoù gwazadur, termenet evel-henn : un teuliad gwazadur zo ur strobad teulioù arveret en un degouezh resis eus ar standur; da skouer, an teuliad, ennañ eizh teul, kaset d'an danvez skoliad evit e enrollidigezh. Studiet eo bet an holl zegouezhoù, an holl eskemmoù, a c'hell c'hoarvezout en darempredoù etre ur skoliad hag ar Strollad, hag evit pep hini ez eus bet diferet kaser, degemerer hag endalc'h an teuliad gwazadur rekis. Pep teuliad a vez anavezot dre ur merk, graet gwazyerk anezhañ. Da skouer, evit kevroll ar skolidi e konter 26 teuliad gwazadur, merket eus T-1 da T-26. An teuliadoù eus T-1 da T-8 a sell ouzh enrollidigezh ar skolidi, eus T-9 da T-21 ouzh an darempredoù e-pad ar bloavezh-skol etre Gwazva ar C'helenn, Gwazva ar C'hreizennerezh hag ar skolidi, eus T-22 da T-26 ouzh bastidigezh ar Yalc'hadoù-studi (skolidi zo, hag int krennarded ne c'hellont ket di-yalc'hañ gwerzh ar gwirioù enrollañ; bennozh da vrokusted un nabeut brogarourion eo bet S.A.D.E.D. e 1964 evit reiñ dezho yalc'hadoù-studi). Aes eo kompren pegen assaet eo bet labour ar C'hreizennerezh gant reizhiad an teuliadoù gwazadur. Pa zegouezh gantañ an urzhioù-mañ digant ar Gwazvaoù

all : kasit T-1, pe T-20, pe T-34 d'an den-mañ-den a-barzh an deiz-mañ-deiz, e oar dre leun pep linenn eus al linher-kas kement en deus eghomm da c'hou- out evit seveniñ ur gread a c'houlennefe a-hend-all ur bajennad diskleriad- urioù. Ar pep pouezusañ avat eo ar gounid o deus graet ar skolidi : santout ha gouzout a reont e vez graet gant evezh war-dro kement tra e reont pe na reont ket, - da skouer, da geñver ar mankoù a c'hell ober ur skoliad o kas pe o tremen hep kas ur boelladenn ez eus hepred, prest da vont en hent, evezh rummad lizher disheñvel e klenkelloc'h ar C'hreizennerezh. Bennaoc'h da hevelep reizhiekaerezh e c'heller lavarout eo kresket aketusted ar skolidi da gas o foelladennoù eus 30 % en ur ober ur bloaz.

2.2. S.A.D.E.D. o kemer e blas e Breizh a skouln darempredoù nevez gant oberennoù all breizhek ha nannbreizhek. Eus an darempredoù-se e reomp ar darempredoù diavaez dreistadur. Renet e vezont gant Gwazva ar Genurzh, dre hantererezh Gwazva ar C'hreizennerezh. D'an deiz ma vo ast S.A.D.E.D. d'ur rann en ur framm ledanoc'h e teuy hevelep darempredoù da vezañ lod eus ar standur.

Dre berzh ar skouerikaat kaset da bennvat e kement skourr obererezh e 1964 eo bet disammet Gwazva ar C'hreizennerezh eus emalloù a oa bet en e gefridi betek-henn : an embann, an diellaouiñ, ar bruderezh zo bet fiziet e Rann an Embann, e Rann an Diellaouiñ, e Rann ar C'helacuiñ, o zri bremañ skourroù Gwazva ar C'hengoun.

IV. - DANEVELL GWAZVA AR GENURZH

Kenurzhiañ eo kefridi ar Gwazva-mañ. Gant meur a zoare kenurzh en deus da blediñ : kenurzh hollek, kenurzh diabarzh, kenurzh diavaez.

00.I. Ar kenurzh hollek zo anezhi merkañ palioù d'ar Strollad ouzh o reizhañ diouzh ezhommoù ar vro. S.A.D.E.D. n'en em lak nag evel un derou nag evel ur finvez. Er c'hontrol, fellout a ra dezhañ kenderc'hel gant an hent a voutc'has araozañ tadoù ar Vro ha tadoù an Emsav war-du ar pal merket ganto. Mar degouezh gantañ ober diouzh hentenoù disheñvel, ne gemm ket an hent. Damant S.A.D.E.D. eo en em gonurzhiañ diouzh Istor ar Vro.

00.II. Ar kenurzh diabarzh a sell ouzh kenurzh ar framm, kenurzh an obererezh, kenurzh an dud.

A. Kenurzh ar framm zo he fal rannañ maez obererezh ar Strollad e tachennoù labour ha sevel an niver rekis a skourroù obererezh evit fizout

pep a dachenn enno. Diouzh meur a zerez eo bet rannet ar skourroù obererezh. En derez uhelañ emañ ar Poelligor : ar Poelligor-Leviañ, emañ an Izili oberiant, ar Poelligor-Harpañ, emañ an Izili-Harpañ. En eil derez emañ ar Gwazva, pep hini o plediñ gant ur c'helc'h obererezh klok; da skouer kement a denn d'an arc'hant zo e dalc'h Gwazva ar Mererezh. En tredo derez emañ ar Rann, pep hini o labourat war ur gennad resis a obererezh; da skouer Rann an Diabarzh o plediñ gant ar genurzh e diabarzh ar Strollad. Er pevare derez, e ra an Adrann war-dro ur rumm resis a gefridioù; da skouer, Adrann ar C'hoskor emañ en he c'hefridi prientiñ ar c'hevratoc'h gant an Izili. Ar pempet derez zo gant ar Gefridiaded; pep kefridiad zo fiziet emañ an emell eus ul labour resis.

B. Kenurzh an obererezh. E Gwazva ar Genurzh e vez fiziet an emell da raktresañ al labour evit ar Strollad a-bezh. Pep skourr obererezh a zave dirazañ o raktresoù darnel da vezañ enframmet en ur raktres hollek, lakaet e kont barregezhioù ar mare. Da skouer, evit ar bloavezh-skol-mañ, e voe kinniget gant Gwazva ar C'helenn, ouzhpenn sevel an daou rummad nevez Kimiszh ha Krennvrezhoneg, adober ar rummad Douaroniezh. Da velout en deus bet Gwazva ar Genurzh : a) ha deraet e oa reiñ ar reiñver labour- se d'ober da Rann an Embann, b) hag asantiñ a ras Gwazva ar Mererezh arc'hantañ an embannidigezh-se, k) studiañ gant Gwazva ar C'helenn, gant ar gelennerion Douaroniezh pergen, hag-eñ ne oa ket un diskouln all, gortoc'h bloaz da skouer hag azeuziñ ar c'hentelioù en doare da dennañ daou rummad Douaroniezh e-lec'h ar rummad kozh...

K. Kenurzh an dud. Gwazva ar Genurzh a rank plediñ ivez gant pep hini eus Izili ar Strollad, ober un enklaek war hep danvez Ezel, gouzout ha seveniñ a ra pep Ezel ar gevrat en deus sinet. Kement klema a-berzh un Ezel pe ouzh un Ezel a vez daveet dirak Gwazva ar Genurzh. Lekaomp e tiskouezfe un Ezel un emzalc'h nozus ouzh Breizh pe ouzh ar Strollad; emell Gwazva ar Genurzh eo sklaeraat an afer ha reiñ un disentez a c'hell mont betek tennañ e ditl digant an Ezel. Heñveltra, pa en devez un Ezel diaesterioù e diabarzh pe e diavaez ar Strollad en abeg d'e obererezh breizhek, e c'hell degas an afer dirak Gwazva ar Genurzh a zivizo ha gull- out a ra S.A.D.E.D. kemer perzh en dael.

Eval-reizh, e c'heller ober engalv ouzh pep disentez roet gant Gwazva ar Genurzh. Anvet e vez neuze gant ar Poelligoroù barnerion evit adwelout an disentez arzalet.

60.III. Ar Genurzh diavaez. Kefridi Gwazva ar Genurzh zo ivez skoulmañ darempredoù a bep seurt gant kevredigezhioù all, da skouer : emezelañ en ur c'hevre sevenadurel pe bolitikel, sinañ kevraoù amzeriat pe badus e-keñver kelennerezh, bruderezh, arc'hanterezh; pe c'hoazh sevel mouezh a-du gant un dalvoudegezh vroadel en arvar, enep pep direizhder ha gwaskerezh.

Setu bremañ al labour bet sevenet a 1964 gant Gwazva ar Genurzh :

64.I. E-keñver ar genurzh hollek ez eus bet strivet da spisaat lec'h an deskadurezh vrezhonek e Breizh a-vremañ a-gevreizh gant an hengoun broadel ha stad an traoù en hor mare. An div displegadenn diwezhañ a bleustro gant an danvez-se (sl.: IX. ha X.).

64.II. E-keñver ar genurzh diabarzh :

A. Kaset ez eus bet da vat frammidigezh ar Strollad. Spisaat eo bet an tachennoù obererezh pennañ ha savet e-keñver pep hini ar skourr obererezh dereat. Kemereat eo bet ar skourroù obererezh dre ur framm start ha pleustrek. Pemp Gwazva a ya d'ober ar framm-se, enno an dud rekis evit o lakaat da vont en-dro.

Evit a sell urzhiañ ar mont en-dro ez eus bet lakaet tamm-ha-tamm e pep skourr darempredoù labour war gelañ da gemer lec'h an darempredoù war skin. Displegan a reomp. Setu ur skouer a zarempredoù war skin : ur gelaouenn. Ur wezh embannet un niverenn ha skignet e-touezh al lennerion, ne vez ket dileet d'ar re-mañ kas netra en eckemm. Eo, gwerzh o c'hemant; hogen n'eo ket un eckemm gwirion. Skinañ a ra ar gelaouenn evel ur steredenn, ha ne oar ket pe donkad zo d'he skinoù. Bremañ ur skouer a obererezh war gelañ : ar skol dre lizher : ur gentel a ya, ur boelladenn a zeu, h.a. En obererezh war gelañ e oar e pep mare pep hini eus ar re a gemer perzh ennañ penaos ennañ kont gant ar re all, gant ar pep all eus ar reizhiad. Un obererezh war gelañ hon deus diazezet evel-just evit ar gelaouadurezh, hogen ivez tamm-ha-tamm evit pep hini eus skourroù all ar Strollad. Kemereomp da skouer ar skodennoù paset gant an Izili-Harpañ da Wazva ar Mererezh. Bep pemzektez e kas Kefridiad ar C'haf stad an degouezhadennoù arc'hant en div skouerenn d'ar C'hreizennerezh. Ur skouerenn a ya d'an Dielloù, eben d'ar C'hafriad a-berzh ar Mererezh evit an darempredoù. Hemañ a sav stad kont an Ezel e teir skouerenn, hag o fizi er C'hreizennerezh. Ur skouerenn a ya d'an Ezel-Harpañ war un dro gant ul lizher trugarekaat, an eil skouerenn a ya da Gafriad ar C'haf, an drede a ya d'an Dielloù. Evel-

se e vez skoulmet ur c'helo'hiad klok a zarempredoù : an Ezel-Harpañ da gentañ, ar Mererezh, hag ar Poallgor-Leviañ, pep hini o c'houzout e pep mare kement en deus ezhomm gouzout diwar-benn ar c'hraf boutin etre an tri.

B. Obererezh pemdezic ar bloavezh zo bet renst evel raktreset. N'eus bet kudenn ebet er c'hevre-se, nag e-pad an eil bloavezh-skol eus genver da c'houere, nag e-doug hantarenn gentañ an trede bloavezh-skol eus gwengolo da zivrezh ar bloaz. Ur wezh priantet an tresoù labour gant Gwazva ar C'helenn hag ar Gwazvaoù all n'en deus bet nemet stadañ d'ober e oa kaset da benn pep kefridi a koula hag e kentel.

K. E-keñver kenurzh an dud : degemeret ez eus bet seizh Ezel-Harpañ nevez hag un Ezel Oberiant nevez.

Un Ezel-Harpañ en deus roet e zivrezh evit un abeg a genurzh.

64.III. E-keñver ar genurzh diavaez :

a) emezelet eo S.A.D.E.D. e Kuzul ar Brezhoneg abaoe ar 6 gwengolo 1964. Kevredigezh an Deskadurezh Nevez a zo S.A.D.E.D. ur skourr anezhi he deus roet da S.A.D.E.D. an aotre da emezelañ en-distag e Kuzul ar Brezhoneg.

b) studiet ez eus bet un danvez emglev gant Kêr-Vreiz evit sevel ur strollad kenteliañ diazezet e Paris dindan genrenerzh Kêr-Vreiz ha S.A.D.E.D. dindan an anv : Skol Abeozen. O vevañ ma tenn avat obererezh Skol Abeozen d'an deskadurezh kentañ derez diouzh un tu ha d'an deskadurezh uhel derez diouzh an tu all ez eus bet kavet gwell chom hag sinañ an emglev. Disoc'h nac'hel an darempredoù etre Kêr-Vreiz ha S.A.D.E.D. zo ent da lakaat e kiriegezh S.A.D.E.D.

k) goulennet ez eus bet ur skoaziadenn arc'hant digant Kuzul ar Brezhoneg. Degemeret ez eus bet 300 FF. Ar bloaz a-raok e oa bet degemeret 200 FF. Trugarekaat a reomp Kuzul ar Brezhoneg.

d) goulennet ez eus bet ur skoaziadenn arc'hant digant Emglev Breiz-Fondation Culturelle Bretonne. Ur goulenn kentañ, kaset d'ar 17.12.63, a vanas direspont. Un eil goulenn, kaset d'an 11.05.64, a vos respontet e 1963, peogwir "ne chome kazimant netra er C'haf"; koulskoude e oa pedet S.A.D.E.D. da gas e c'houlenn evit 1964 "a-raok fin ar bloaz, war-dro miz kerzu." Un trede goulenn a vos kaset enta, evel aliet, d'an 03.12.64. En e respont, e nac'ha an Ao.MEVEL ar wezh-mañ kas ar skoaziadenn goulennet 1) "dre ma ne oa ket degouezhet gancomp goulennoù-sikour ar Strolladoù ezel er C'huzul" 2) peogwir "ez eus bet roet gant Emglev Breiz ur yalc'ha



dour, Atom ha frammatoù atom, Goulakadenn Avogadro, Notadur kimiek, Oksigen, Hidrogen, Perzhioù kimiek an dour, Klor, Amsav an elfennoù, Kloridenn Hidrogen ha trenkenn glorhidrek, Soda, Raz.

D'an 31.12.65 e oa kaset da benn prantad studi ar pempet kental eus pep rummad.

Diwar desteni an holl gelennerion e sav tamm-ha-tamm war c'houre ur dour e-touezh ar skolidi. Ul labour tenn e vez goulenet diganto : peell-adennoù zo a c'houlemañ ugent survezh hag ouzhpenn a brientidigezh; mar tremen kefridiadeg ar Gwazvaoù hanternozvezhioù, nozvezhioù a-vezhioù, war o skriverezed pe o liestennerezh, e vez heñvel gont gant ar skolidi. Al labour kalet-se zo ar gwellañ arnod evit dizoleiñ ar re a vo gouest da sammañ kefridiñ ar vro od'h adsevel hag ar vro adsavet.

Skolidi an trade bloavezh-skol, dre berzh seurt dibaberezh dre al labour tenn, zo uheloc'h o live eget skolidi ar bloavezhioù kentañ, - ur darn vat zo an hevelep re, uhelaet neuze o live deskadurel, o live denel ivez.

E-kerz ehan-skol an hañv 1964 e voe dilauriet kelennerion gant Strollad an Deskadurezh Bil Derez da Gamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion evit aozañ dindan renererezh ar C'hamp ur rummad kentelioù a-live gant ar skolidi bet degemeret en Trec'h Kentañ. Dre aked pemp kelenner anvet gant Gwazva ar C'helenn e voe aozet ur rummad pevarzek kental pe dalc'h-kelenn e Lokronan-Leon eus an 29.07 d'ar 14.08.64. Setu ar roll anezho, gant niver ar selaouerion bep tro :

- 30.07. Geriaoueg diazez ar Jedoniezh. 11 skoliad.
- 31.07. Kental grenngembraeg : Pwyll Pendeuc Dyet. 14 skl.
- 01.08. Memozioù ha geriaoueg diazez ar Fizik. 8 skl.
- 02.08. Geriaoueg diazez ar Jedoniezh (kendalc'h). 13 skl.
- 04.08. Kental Yezhadur : stummoù e -fe hag e -je. 18 skl.
- 05.08. Dalc'h-kelenn halavarded. 15 skl.
- 06.08. Mentawouriezh. 16 skl.
- 07.08. Kental grennvrzhoneg. 15 skl.
- 08.08. Lemnegezh a Vro-Ereg. 16 skl.
- 10.08. Lemnegezh a vremañ : Maodez Glanndour. 12 skl.
- 11.08. Douaroniezh : penaos studiañ amzerzh ur vro. 14 skl.
- 12.08. Lemnegezh a vremañ : Maodez Glanndour (kendalc'h). 12 skl.
- 13.08. Kental gimiezh. 12 skl & Radio-Kimerezh.
- 14.08. Dalc'h-kelenn : displegadenn dre gomz gant pep skoliad war an destenn : Penaos e welit dasont ar brezhoneg ? 10 skl.

Da heul pep kental e veze lakaet ar skolidi d'ober ur boelladenn war danvez an deiz kent kuitañ ar sal.

VII. - DANEVELL GWAZVA AR MEREREZH

E-ser reizhañ obererezh ar Gwazvaoù, ez aus bet divizet a vo renket hiviziken ar c'hontoù e daco rumm : kontoù-moneiz ha kontoù-feiz.

Ar c'hontoù-moneiz zo kontoù an arc'hant degemeret ha dispignet gant ar Strollad. Evit sevel ar c'hontoù-moneiz ez aus bet divizet un doare pleustrekoc'h da sevel ar stad vloziek. E-touezh traoù all, e lakaer hiviziken pep fakturenn e kont d'an deiz ma tegouezh gant Gwazva ar Mererezh, ha ket, evel a-raok, d'an deiz ma vez dizleet. Dre-se na vezo ket astolet dleoc'h ur bloavezh war egile. Alese ar Stad Kontoù 1963 nevez a embannomp, disheñvel diouzh an hini embannet da heul bodadeg-vloaz ar 5 genver 1964.

Ar c'hontoù-feiz zo, troet en arc'hant, gwerzh kement labour sevenet dic'hopr gant Izili ar Strollad, kement dispign graet evit mad ar Strollad gant e Izili.

I. KONTOU 1963

1. KONTOU MONEIZ

A.- Ezkef

Mizoù standur Gwazva ar C'hreizennerezh...	1 466,10
Mizoù standur ar Gwazvaù all.....	2 020,76
Mizoù dreiststandur (liestennerezh prenet).	2 360,00
Hollad.....	5 846,86

B.- Enkef

Skodennoù an Izili Harpañ.....	3 410,68
Skoaziadennoù.....	310,00
Menteladur Kreizennerezh.....	470,00
Hollad.....	4 190,68

K.- Mentel ar bloaz

Dleoud..... 1 650,16 FF

2. KONTOU FEIZ

Labour : 3 260 h dewerzhut da 10 FF.....	32 600,00
Dezougerezh : 24 800 km da 0,50 FF.....	12 400,00

Hollad..... 45 000,00 FF

VIII. - RAKTRESOU EVIT AR BLOAZ 1965

II. KONTOU 1964

1. KONTOU MONBIZ

A.- Enkef

Misoù standur Gwazva ar C'hreizennerezh...	2 542,62
Misoù standur ar Gwazvaoù all.....	1 419,78
Misoù dreiststandur (skrivererz prenet)....	1 260,00
Hollad.....	5 222,40

B.- Enkef

Skodsennoù an Izili Harpañ.....	3 372,31
Skodsennoù.....	1 599,40
Mentaladur kreizennerezh.....	618,87
Hollad.....	5 590,58

K.- Mental ar bloaz                      Kaoud..... 368,18 FF

D.- Mental hollek                      Dleoud..... 1 282,00 FF

2. KONTOU FEIZ

a) Burvezhioù labour nanu gopret :

Kreizennerezh...	1 800
Kemurzh.....	500
Kengoun.....	1 000
Kelenn.....	2 500
Mererezh.....	200

Hollad..... 6 000 h

dewerzh 10,00 FF pep hini..... 60 000,00

b) Dezougerzh : 20 000 km da 0,50 FF.... 10 000,00

Hollad..... 70 000,00 FF

Mezhoù a reer an diforc'h bras a zo etre ar c'hontoù-moneiz hag ar c'hontoù-feiz. Kalonekaus eo gwalout e kaver tud e Breizh evit gouestlañ milionoù eus o arc'hant hag eus o amzer en adsavidigez ar vro. Direizh ivez eo gwalout an nebeut ez int e gwirionez, n'eo ket a-keñver poblañs Yreizh, n'eo ket zoken e-keñver an Emsav, nogen e-keñver ar re a ra broadslourion anezho c-unar. An evezhiadenn-mañ a dalvez evit S.A.D.E.D.; talvezout a ra evit kement oberenn vroadel a zo e Breizh, ken prizius ha S.A.D.E.D. evit dazont hor bro.

1965 a vo ar bloavezh kentañ da vezañ urzhiat diouzh raktresoù hollek S.A.D.E.D., da lavarout eo e vo rannet e tri fevarmiziad :

- genver-ebrel evit eil hanterenn an trede bloavezh-skol,
- mae-ecot evit an ehan-skol,
- gwengolo-kerzu evit hanterenn gentañ ar pevare bloavezh-skol.

Evel a ouzer e padas ar c'hentañ bloavezh-skol eus mezheven da gerzu 1963, an eil eus genver da c'houere 1964, hep tamm ehan-skol. Lakaet e vo hiviziken un ehan-skol eus mae da ecot evit reiñ tu d'ar skolidi a heuilh un deskadurezh all da dremen arnodennoù.

Gant gwengolo 1965 e tarcoue ar pevare bloavezh-skol. War ar roll-kelennadurezh anezhañ ez eus dek rummad, eleze kant kentel. Daou rummad lennegezh, daou rummad Fizik, ur rummad Krennvrezhoneg, ur rummad Istor, ur rummad Douaroniezh, ur rummad Kimiezh, ur rummad Jedoniezh, ur rummad Bevoniezh. An daou rummad diwezhañ-mañ zo lakaet evit ar wezh kentañ war roll-kelennadurezh S.A.D.E.D.

E-pad ar pevar miz ehan-skol ne chome ket Gwazvaù S.A.D.E.D. dilabour. Ouzhpenn an oberiadegezh-standur e roio prientidigezh ar pevare bloavezh labour bemdez da Wazva ar C'helenn, hag ivez d'ar pevar Gwazva all. Darempredoù a vo skoulmet gant ar skolidi a zo hiviziken stummet a-walc'h evit kemer o renk er Strollad evel kelennierion pe gefridiaded. Kelennierion a c'hell bezañ dileurist c'hoazh e-pad an hañv evit reiñ rummadoù kentelioù dre gomz evel e 1963 ha 1964.

Evit mañ skolidi S.A.D.E.D. emañ Prader o vont da embann levrioù skol : a-benn miz e vo lakaet e gwerzh un dornlevr Krennvrezhoneg, hag e-tro miz Eost un dornlevr Jedoniezh; goude-se, un dornlevr Yezhadur.

Trugarekaat a reomp ar C'hevredigezhioù a heñch o skolidi hag o izili war-du S.A.D.E.D. :

da gentañ Skol Ober a ra bruderezh evit hor c'hentelioù e-touez skolidi an Trec'h Kentañ. Un abeg all zo d'hon anaoudegezh ouz Skol Ober : hep Skol Ober ne vije ket hiziv a S.A.D.E.D., pa voe stummet ganti an darnvuiañ eus hor c'helennierion hag eus hor skolidi; trugarekaat a reomp Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion a zo brasañ skol vrezhonek dre gomz hor mare. Ne ankouomp ket ez eo e-pad dalc'h K.E.A.V. e vez enrollet an hanter eus hor skolidi bep hañv;

trugarekaat a reomp Skol-Veur Drouizad, Barzhed hag Uvizion Breizh evit an emzalc'h dogemerus ha skoazellus he deus diskouezet ouzh hor Strolled.

#### IX. - DISPLEGADENN : TALVOUNDEGEZH AN ISTER EN DESKADUREZH

Erudet a-walc'h eo S.A.D.E.D. en abeg d'eo strivoù evit brezhonekaat tachennoù zo eus ar skiantoù arnavez, ken e kredfe marteze da hiniennoù ez omp ur strollad skiantourion hepken. Koulskoude, ar gelennadurezh a reomp zo kalz ledanoc'h eget ar skiantoù, peogwir e pled ivez gant al lennegezh, gant ar c'hrennvrezhoneg, hag en diwesh gant an istor.

Daoust d'an alioù roet dezho ez eo bet alies sonezhet ar studierion war an istor gant ar c'hentelioù daveet dezho. Fellout a ra deomp hiziv spisaat petore talvoudgezh a reomp-ni da studi an istor.

Unan eus ar goulennoù graet ouzhip eo homañ : "Perak n'eus ket muioc'h a c'houlennoù war an darvoudoù etre an 10<sup>t</sup> hag ar 15<sup>t</sup> kantved, ha perak en enep e c'hoent keit-all da studiañ an 20<sup>t</sup> kantved a zo anavezet mat gant an holl ?"

Aes e vez kas ar studier a ra hevelep goulennoù d'an alioù roet dezhañ e derou ar bloavezh-skol hag ankounac'haat gantañ daoust pegen pouezus e cant : "Ul lodenn gentañ, ha hi berr a-walc'h, zo gouestlet da Istor Breizh er c'hantvedoù tremenet; un diverrañ n'eo ken, un ad displegadur eus ar pezh a zo bet diazezet gant hon istorourion vroadel ha d'eo heul gant levr Danic."

"An eil lodenn, an hirañ, a bled gant Breizh a-vremañ ha pourgetket gant Istor an Emsav. Kinniget e vo deoc'h ur gelennadurezh dibar, anezhi an arnod kentañ da strollañ an darvoudoù kompredel. Tennañ a ra er c'hentelioù-mañ e mad eus labourioù Youenn Olier ha Pêr Denez, hag ivez eus al levrioù embannet abaoe an eil brezel-bed gant gallegerion; diazezet int dreist-holl war dielloù diembann kouls hag embannet."

Istor Breizh ne vez ket keletet e skolioù ar C'hallaoued. N'eus nemet e skolioù an Emsav, pe diwanet dre levezon an Emsav, e reer anv eus un Istor Breizh. Neur a zoare zo koulskoude da sevel "un" Istor Breizh. Pa zigorer al levrioù a zo warno an talbann-se e tsu anat an dispartizh.

Bez' ez eus an "Istorioù Breizh" a lak fin da bep tra gant an Dispac'h

Gall : Breizh a zeu da vezañ pemp departamant, Istor Breizh a spluj en Istor Frañs hag echu, n'eus mui nemet ur vro, ur bobl, hag un istor. Adalek neuze e reer anv eus ar Frañsision Veur roet gant Breizh : Chât-caubriand, Lammennais, Lañnec, eus an 250 000 Breizhad a "reas" e buhez evit Frañs, h.a.

Bez' ez eus an Istorioù Breizh a lak un troc'h etre Breizh-Uhel ha Breizh-Izel, etre Breizh c'hallek pe romenek ha Breizh vrezhonek; Breizh-Uhel o vezañ graet an Istor, Breizh-Izel ar sevenadur. E gallec ar politikerezh, e brezhoneg al lennegezh.

An daou droc'h-se ne asantomp ket dezho. Peogwir n'int ket diouzh ar wirionez. Peogwir int trapoù stignet evit herzel ouzh adsav an emskiant vroadel.

N'int ket diouzh ar wirionez. Ar skoudenn eus Breizh oc'h echuiñ e 1789 zo hepken diouzh youl nac'hom ar Frañsision. Divedet e voe Stadoù Breizh ha gante rasklet an erv stadel oc'h shelañ 1200 vloaz a vuhez vroadel. An erv-se a zeu betek enomp koulskoude : an Emsav eo. An Emsav zo e ster istorel bezañ ar merk na rankomp toullañ dioutañ evit reiñ gwirvoud en-dre d'hor bro. Setu perak e pouez kement hor c'hentelioù war Istor an Emsav. An holl ac'hanoù zo hor plas en ul lignez eus Istor Breizh : savarion koadedoù, levrierion speredel, pannoù brezel, politikerezh. An Istor ne ginnigomp ket evel danevell un dremened peurechu, hag an Emsav evel ur guchennad kevredigezhioù lec'hel e plediñ gant anaoudegezh hag interestoù ur c'horn eus ar bed. Breizh Havance, Breizh an Dugelezh, Breizh flastret e priediñ hec'h emsav n'int nemet ur Vreizh. Setu pezh a fell deomp lavarout pa zisplegom d'ar skolidi : "Hor pal kentañ zo kelenn d'ar skolidi Istor o bro, n'eo ket hepken an "istor-kentañ", an istor hanerel, hogen ivez an "istor-tonkad", an hini a zo bev dindan hon treid ha digor dirazomp (...). Ar c'hentelioù a glasko degas ar Vrezhoneg yaouank da gemer ur preder istorel lema gant tonkad o bro."

An diwan etre sevenadur ha politikerezh ne asantomp ket muioc'h dezhañ. Hag aze ivez, e tiskouezas an Emsav ar wirionez hag e stardas ar skoula adalek an derou : e pep skourr obererezh anezhañ, ken al labour, ken en emgann, ez eas Breizhizelin ha Breizhubelin skoaz ouzh skoaz. Buhez ha marv Yann-Vari Ferrot a ro gwirioù da Vreizh vrezhoneger war tonkad politikel ar vro, evel ma ro buhez ha marv Debauvais gwirioù da Vreizh-Uhel war ar brezhoneg. S.A.D.E.D. en deus roet al lusk d'al labourioù istorel e brezhoneg, rak e brezhoneg e tle bezañ displeget ar memorioù

politikel ha frammet ar vro.

Skolidi S.A.D.E.D. o tibab ar rumadoù kenteliek skiantel a ziskouez o youl da enframmet o bro er bed arvevez; o tibab niverus rumad an Istor avat, a ziskouezont bezañ meizet mat talvoudgezh an Istor evit o stumadigezh a saverion-vro.

Gonit a reont spered an unvaniezh, dre ziverkañ diouzh o weiz, diouzh o buhez an troc'hoù bet lakaet enno gant an impalaerouriezh.

Gonit a reont spered ar wirionez istorel, na oant ket bet evit deskiñ keit ha ma vezent diskibion c'hall war Istor Frañs; Istor Frañs ne o'hell bezañ evidomp nemet istor hor mac'honerezh. Istor Breizh zo alies istor un diskar, istor o'hwitadennoù bras, istor psouridigezh hor pobl ha distreserezh hor sevenadur. Splanno'c'h a-se eo istor ur galonegezh kantvedel, istor ur feiz noaz didroc'huz en hor gwad hag en hon tonkad. Diaes eo a-greiz klad ha galloud an impalaeriozhoù kemer preder ouzhpenn gant ar wirionez. Evit Breizhiz avat, meur a wezh en o istor ne chomas dezho e kreiz an dismantrou nemet o feiz hag o nerzh-kalon. N'eus par da seurt reuziadoù evit lakaat an dud da stekiñ ouzh ar wirionez ha d'ha c'harout. Setu perak e reomp eus ar skol Istor Breizh skol ar gadourion wirion, skol ar saverion vro.

#### X. - KLOZADUR

Soñjet hon eus, goude daou vloavezh labour tenn ha dizehan, e oa mat ober ur sell-tro war dachenn hon labour, ha reiñ d'hor strivadennoù o star e-keñver un dremwel ledanoc'h.

Poent eo ivez sklaerast star ar pezh a reomp, ha pa ve hepken evit eilgeriañ goulennoù graet ouzhipp alies, ha dizarbenn an treuzvarnoù.

Ne ziskouezimp nemet pezh a zo deust diogel deomp. Ar pezh a arvarus a zo e tonkad hor Strollad, e tonkad hor bro, ne guzhomp ket ouzhipp hon-unan, nemet e tavomp warnañ. An troc'h hepken a o'hell klozañ. Mar greomp stad eus arsakadennoù, n'eo ket dre fouge. War un dro e ziskouezomp ez eus ouzhpenn abegoù dic'hoanag da gaout.

S.A.D.E.D. n'eo ket ur gevredigezh kuzh. Hor strollad n'eo ket ur strollad politikel. Padal, ur star politikel zo d'ar pezh a ra S.A.D.E.D.

S.A.D.E.D. a lakaomp da lodenn eus ur framm klok. Ar framm klok zo kement ensavadur ha deus hor bro ezhomm evit bevañ e-touez ar broioù all. S.A.D.E.D. en deus dibabet un dachenn resis, an deskadurezh eil

derez; n'emañ ket e soñj mont er-maez eus an dachenn-se.

Evitañ da vezañ war un dachenn strizh avat, en deus hor strollad ur pal politikel. Dibabet en deus bezañ war an hent a gas d'ur Stad Vrezhon. A-walc'h eo evit bremañ, evit gouzout epis kement en deus d' ober, lakaat emañ S.A.D.E.D. war an hent a gas d'ur Stad Vrezhon. Bep ma klokaio d'ar framm e spisaio da stum ar pal.

Dre-se, e diabarzh S.A.D.E.D. ne vez ket anv alies eus ar pal pellañ; hogen eus palioù nesañ, war dachenn, kemeret gant an holl avat evel diougenoù eus ar pal pellañ.

Ar baotred hag ar merc'hed a dremen dre S.A.D.E.D. evel skolidi a oar n'eo ket evit magañ hui-vreoù war Vreizh dieub e vezont degemaret er Strollad. Torret e vefe buan eskell o faltazi mar befe ezhomm. Kentañ a c'houlenner diganto eo deskiñ labourat. Labourat evel m'en em ganner pa vez peuraloubet ar vro, a-benn gouzout un deiz en em gannañ evel m'eo devo labourat e S.A.D.E.D. O aked, o c'halonegezh a ziskouez e komprenont an dra-se. Pa lakaont, el lec'h na oa metra nemet an dezrzh gall, ur gwirvoud brezhon, ur boelladenn Istor pe Grenn-vrezhoneg, e ouzont e tiraeront aze ur pal o splannañ dija evel ma splanno Breizh d'an deiz m'eo devo-i da azezañ en hec'h anv en-dro d'ar pallennoù gwer europat pe hollvedel.

Ur strollad-prientiñ eo S.A.D.E.D. N'en em lak ket d'un Aozadur Stad. Aozadur Stad e vo d'an deiz hepken ma vo enframmet an un urzhiadur klok o tere'hal ennañ holl rannoù buhez ar Stad.

Padal en deus hor Strollad kejet adalek an derou ouzh kudennoù stad. Ne reomp nemet ur skouer.

Ur gudenn zo bet gant frankiz an hiniennoù. Penaos mont d'an heveloù paz, en urzh strizh, gant un hent n'eo ket treset c'hoazh, hep gwallañ frankiz an hiniennoù, hep moustrañ o youl reizh ?

Ar re a labour da vat er Strollad o deus nebeutoc'h a frankiz. N'eo deus spi ebet da gaout muioe'h kent pell. Bep ma kraeko ha ma startaio ar framm a-benn ar striv garv a raio he Stad Rez da Vreizh, e kollo pep strivour nevez kalz eus e frankiz.

A-raok bezañ er Strollad e leuniasp hon amzer vak gant al labour breizhek hor boa dibabet, dieub ma camp d'e ren evel ma karemp. Hon "engouestl breizhek" hon leze en hor frankiz leun, henn anavez a reomp hiziv gant mezh. Keфридоù ar Strollad o deus aloubet hor buhez, ket hepken hon amzer vak. Goñt a ouzomp n'eo se nemet un derou. Goñt a ouzomp

hor be dibabñ all kalz krisoc'h d'ober.

E gwir, ar frankiz a zilezomp eo ar frankiz hiniennel. Hag ur frankiz all hon eus gonzet, tostoc'h dre he natur ouzh ar frankiz a vennomp gwelout o vleuniañ e kumuniezh vroadel Breizh adsavet, peogwir ez eo, e-lec'h frankiz ansklaer ha displevarus an hiniennoc'h, frankiz ar gumuniezh a zo eus labourerion S.A.D.E.D. Tostoc'h ouzh ar wirionez ivez, pa'z eo diazezet war an doujañs, n'eo ket da vennozioc'h hiniennel an dud, hogen d'ar youl a zo e pep hini da ziraec ar wirionez. Ket war ar vignoniezh hag ar c'housañvusted, hogen war dserijenn tud a car ez int koll, int ha mañoc'h egeto, mar c'hwitont un diatarad war an hent reizh.

Ar geneiled a zeu da zalc'hioù labour S.A.D.E.D. a car pagement e vez doujet d'an den gant ma ve an den gwirion e-keñver e gumuniezh. Anavezout a reont ivez an daeladoc'h taer a sav alies etrezomp; ha penaos a teu bepred an daeladoc'h-se d'o zornen dre zisoc'hañ, neket gant treuz-varc'hadoù a vignoniezh, hogen gant lakadurioù o reiñ e beurwalc'h d'ar youl a wirionez a zo e pep hini.

Al liamm etre izili hor strollad n'eo ket ul liamm a vignoniezh. Evit an abeg ma n'eo ket hiniennel, ha pa ne c'hell ket padout pelloc'h eget gwirionded an dud. E gwir, hevelep liamm n'eo ket disheñvel diouzh ar framm. Ar framm eo. Pa ra unan ac'hanomp pemp kilometr war droad en ere'h da c'hvec'h eus diouzh ar mintin evit dont d'un emvod labour ma n'eus d'ober netra a gement n'en dije gortozet pennek devesh, e c'heller lavarout e sent, evel ma sent ar soudarded. Koulskoude n'eo ket a-walc'h lavarout eo. Gouzout a car ez eo mont d'an emvod evel reiñ anjal d'ar gumuniezh, evel ul liamm gwad er framm bev anezhi. Gouzout a car ivez ez eo al liannoù kumuniezhel bresañ tra er bed, hag e tleer kemerout ar brasañ prader d'o derc'hal bev. Rak enc smañ ar warantiz ma vo ar Stad a savimp tra densel, ha ket ardivink a waskerezh.

Bihan eo hor strollad c'hoazh. An arvar evitañ avat n'eo ket mont da get, hogen mont d'un eozedur diazezet mat, marv ennañ an darenpredoc'h kumuniezhel hag ar youl d'ar wirionez o stegne. An arvar eo e paonezfe ar framm a vezañ ar skoula etre gwirionez hor buhez hag ar gwirvoud istorel.

Setu lavaret ar pep diogelañ eus arsakadennoù S.A.D.E.D. e-doug daou vloavezh labour. Labourer hon eus war un danvez fetis, savet kentelioù, reizhet skolidi. Klasket hon eus ivez da bep kammed kompren da

belec'h ez aomp gant hol labour. Hor brasañ trec'h moarvat<sup>o</sup> an trec'h war an hiniennelouriezh, klevet ar bobloù diskaret, ha savidigezh hor strollad, neket evel ur c'hevredad, hogen evel ur gumuniezh. Dre barzh hevelep kammed eo douet kreñvoc'h ennomp ar youl d'ar wirionez eget ar vrogarantez. Ar vrogarantez n'ous ket a-walc'h anezhi evit lakaat reizh ur vro, nag un emgann broadel. An hent a glaskomp tresañ eo hent gwirionez ar vro-mañ, a vo gwirionez evit ar Breizhad kenkouls ha gwirionez evit ar Gall. En doare ma vo sklaer da bep hini e zlead, ha ma ranko pep hini ober e zibab evel un dibab a reizhder, ha ket evel un dibab a vennozioc'h.

